

YF_0115_Mallarge

(tamm kreiz)

Tremenet eo gant ar Rouane
Tostait ta da Vallarge
Ha vo gwelet an dud yaouank
O tansal war vord ar c'hae

Ar re gozh hag ar veleien
Ar re a zo gant ho richennou
Zo klask eureujin tud yaouank
Ha dilezel an dansou

Met ni a gano, ni a zanso
Met ni a raio nemet goap anezho
E-barzh ar bed-man ni a zanso
E-barzh ar bed all ni a raio ivez

E-barzh ar bed all ez eus ur zal vras
Preparet evit an danserien
A zo enni kraponiou aour
Deuz krec'h d'an traon ha penn da benn

Bez' zo enni div renkad diaoulou
Rummet ganto a bep tu d'ar zal
A zo gant o ferc'hier houarn
Oc'h ambrochin an dud da zansal

Dansit breman 'ta danserien
Dansit da c'hoarin ho penn
Rag ni a oar awalc'h e-barzh ar bed-man
Penaos n'heuliec'h ket al lezenn